

135.

Cantic.

Var ton gwercs Catel gollet.

1.

Costait ama plabennequis
 Clevit eur ic'helou mewrbet tris
 En noz eo laeret o person
 Gant tud cruel a direron.

2.

En Trede var-nuquent a vis chevreur
 Lo bet quemeret o pastor
 Gant eur vanden tud arrajot
 Cloubou an ifern dirollet.

3.

Kris e vije ar galon na vouelje
 Er prisbital nep a vije
 O clevet ar c'hri ac ar gouelvan
 Dirollet eo ar bleizi var an oan.

4.

O va doue pebes glachar
 Quemeret eo evit criminal
 Abalamou men deves prerequet
 Aviel Jesus de auditoret.

5.

Dan anter nos neves Sounet
 Er prisbital e zint antrect
 Scoet o deus an oll doriou
 En noas ganto edo o armou.

136.

6.

Squëi a reant creen var an or
 abers ar Roue o choulen digor
 ac astit buan na dardit quet
 Rac bera on eus affer bresset.

7.

Ar plach pe deveus o chlevet
 Gant Spont e deveus goulennet
 Pion zo are d'ar poent man nos
 E maomp dija pell so o Repos.

8.

An dirantet a oa presset
 Evel ma voant espiounet
 a barlante Rust a chvero
 ma na zigorit ni a dorro.

9.

An aotrou Gestin a glascomp
 Parlant gantan prest a Rencomp
 Bessa on eus gantan affer bresset
 Da Sant Paol Leon e zeng donet.

10.

Ar plach dan each prest a Savas
 En eur vouela a lavaras
 Autrou Savit dient a lesse
 Mar quellit Savetit o pves.

—

11.

e zeus deuet bourekisien
 ar gallec ne barlantont quen
 Credi a ran a feis parfet
 N'int deuet nemet do quemeret.

12.

Cessit macharit da vouela
 Arruout a die quemema
 Nemeus quet reposit het an nos
 E don pell so oud o gortos.

13.

Disquen a zeas buan d'an or
 D'ho Saludi gant peb enor
 Gant joa en deus o recevet
 evel e vrassa mignonet.

14.

Antreit tud gentil antreit er Sal
 Ma Serrin an or ma rac-dal
 evit brema me oik assur
 eus o pues me respounto.

15.

Ma defe tud va farres certen
 e ve-me sesisset e vellen
 Moik assure evit certen
 e chomfe o pues var an dachen.

16.

An aotrou person pa voant antreit
 Se choar mari en deus lavaret
 Digassit ama pe a dra
 San dud gentil ma da eta.

138.

17.

Oc ive peadra da zibri
 Poent bras eo dero dijuni
 E maint pell zo oik ober zout
 O chaloun dero a elfe manquout.

18.

An dud man o deus respontet
 Ni non eus effer a dra e bet
 Na da zibri na da efa
 Poent bras eo deomp partia.

19.

E choar Mari pe deus clevet
 E ranguent partia var ar moment
 San daoulin pront en em Strincas
 Da chouden guic de brew queas.

20.

Mes ar rema quen arrajet
 No doa na pardonna na gras, e bet
 Partial a bars an deis
 En doun da goll o freis.

21.

A bars sortial demeus an ti
 E lavaras de choar Mari
 Tavit va choar na voelit quet
 Me zui eb dale d'ho queket.

22.

Va gourchemennou da mam queas
 Suo e vero glacharet bras
 A zo e chom e Sant-Divi
 Pedit Doue de chonsoli.

139.

23.

eb amser den em habilla
 var an eur e reng partia
 en e zupen e voant crapet
 var an hent bras e oue cunduet.

24.

Eno edont oñh e c'hortos
 An dud barbar gant o c'harros
 e bars e oue plantet buan
 he a c'hano evel an tan.

25.

Pa edo o passeal an hent bras
 D'ioñh ar groas e quiniadas
 Adieu deoch-u croas ar mission
 Me a meus glachar em c'halon.

26.

Adieu pobl quis a Plabennec
 Me a meus deoch-u presequet
 Sal'het mad atao d'ar c'homsou
 O c'heus clevet eus va quinou.

27.

Plabenneguis c'hui a voelo
 en oñh itis a var e zro
 ispicial e benitantet
 ev guellint mui e tro-r veret.

28.

D'ar sul pa zeot en ilis
 Pebes glachar plabenneguis
 Pa na vellet mui o person
 Peini a gariach a vir gason.

140

29.

Considerit pebes glaihar
 Pa sellot och e dribunal
 E leach ma vere gant dousder
 E selaou e benitantet quer.

30.

Pa sellot oud ar gador Sarmou
 Pebes glaihar en o calon
 Eno e pigne alus
 Sa annonce, deoch ar viriones.

31.

Emaomp e ren er pempet blaves
 Mor boa ar joa en on toues
 Sa gaout tensor ar mission
 Obtenet deomp gant or person.

32.

Mi er boa sur er person mad
 Santel meurbet ac egarat
 A breman er guelomp exilet
 Ivit rei plac, d'an treus plantet.

33.

Evel or salver eo traisset
 Gant eul loden eus e zenvet
 Ne fell quit deomp o discleria
 Mes ar chontre int ar re ma.

34.

Pedom done do fardonna
 Dioch o malic d'or preservi
 Sa rei dero ar sclerijen
 Ma quitaint an devalijen.

141.

35.

Brema e zomp abandonet
 e tre daouarn. an intruet
 Pere a glasq peb. Seurt moyen
 Da ober deomp coll or lereu.

36.

Truesus bras oa clevet
 Tadou a mamou o lavaret
 Petra raïmp-ni och or bugaligou
 No deus na pasq na cathiguismou.

37.

av beorien queis a grie
 a gant eston a zeplore
 aotrou Doue petra raïmp-ni
 Ni non eus den d'or Soulaji.

38.

Or beleien a reng techet
 Or pastor a so prisonniet
 an oll so e glachav ac e Spont
 Ne ouront mui petra reont.

39.

L pad Seiz mis eo bet dal'het
 L castel Brest gant av i'klubet
 Souffret en deus cals a anv
 O velet or persecuti.

40.

Tre chraç av verches on itron
 Sortiet eo eus e brison
 Pedomp Doue creoch bepret
 Ma tui adarre d'or gulet.

142.

41.

Ma tui ar pastor da viret
 An denvet a joa dianquet
 e maint divis
 Clasq techet e raoc ar bleis.

42.

Guelet a raimp map Tobias
 Un den fern mar boa biscoas
 eus ar feis eo ar Sclerijen
 Pedomp oll Doue de Souten.

43.

Dre c'hrac Doue ac or patron
 Gant eur joa vras en or c'halon
 Ev c'hlefimp hoas o presec
 Comson Doue e plabennec

44.

Plabenneguis queit ni a so
 tud miserabl mar deus ev vro
 Privet oump eus or beleien
 ac eus ar Sacrific och-pen.

45.

Sul c'houel ni a renk scrabat
 Sa attrap an oferen vad
 a choas mil obligation
 Don ameseien tud quizion.

46.